

CHANSON neve voar sujet un Ozac'h a so
bet fouetet gant e Vroec: var an ton, Bre-
tonet, d'en em zivertissa,

C'Hoant em be d'o lacat da c'hoarfin,
Pa glesfor petra so c'hoarveet
Gant un Ozac'h demeus ar vro-mân, daïc
tala,

Gant un Ozac'h demeus ar vro-mân
A so bet fouetet gant e Vrœc.

An den-mâ a ranque lusquellat,
Ha mont ives bemdez d'ar ster,
Ha ma na blige quet an dillat, daïc tala,
En divige bazadou leis e lêr.

Que proet da lusquellat ar buguel,
Squis e ma fen oc'h e glevet,
Pe'mar quemerân ur gueuneuden, daïc tala,
Ma mignon, me rai dit monet.

Ma Friet, arabat e fachac'h,
Monet a rân da lusquellat:
Cousquer ase, ena Mabig bian, daïc tala,
Mar fach ho Mam, n'emont quet mat.

Ian, ret e deoc'h sevel ar buguel,
E doma has e vailluri,
Ola ar yot, quempen an ti-mân, daïc tala,
Guelc'hî podou ha scudilly.

Me a ya da dy ma amezeguez
Da gauscal un nebeut c'hoas,

7

Preparit lein aben ma tuin , daïc tala ;
Peaurramant o po fest ar vas.

Quemeret ho plijadur , ma Fried ,
Me yalo d'oc'h avertissa ,
Caout a reot pep tra preparer , daïc tala ;
Aben ma ieufot prest da leina .

Ma Fried , pa vo ho commodite ,
Preist e leia , trempet ar souben ,
Me ya ma-unan d'o servicha , daïc tala ,
Da laquat guin en ho queren .

Ian , queit ha ma vin e leina ,
Laquet buan dour var an tan
Da velc'hi plajou ha scudilly , daïc tala ,
Ha podes ma mabic bian .

Ian , amâ ezeus chomet souben ,
Debret hervez hoc'h appetit ,
Hze esquern a so mat da grignat , daïc tala ;
Mæs ne douchet quet oc'h ar c'hiq .

Ma Fried , me a effe ur banne ,
Ur sec'het bras ameus bremâ :
Quemer da veren eta , mevier , daïc tala ,
Te ac'heus c'hoant tout eus a peb tra .

Mont a ra da rinça e veren ,
Ur maleür gantân so c'hoarvezet ,
Gant ar pres en devoa d'e velc'hi , daïc tala ,
Entre e zaouarn e torret .

Chom a cureu a-gren estoner ,
Ma lavaras en ur grenâ ,
Ur maleür so guenecën arruet , daïc tala ,

8

Torret e ma gueren, emezâ.

Jarnicoton, eme Jaqueta,
Bremâ ny a zanço ar bal:

Tennet ho p'aguezen, va mignon, daïc tala,
M'o po an disciplin ractal.

Taflica flaca a peb costez,
Me ho tesco da derri guer,
Na netra demeus an tieguez, daïc tala,
C'hui oar orfat an traou so quer.

Ma Fried, ho pet ouzin truez,
C'hui lacaï ar goad na redet,
Me effe quent guin gant ma boites, daïc tala,
Evit terri gueren eber.

Guisquet he praguezen, ma mignon,
Ha deut da vouchat d'ar scourge,
Divoallet na dorfac'h davantaich, daïc tala,
Netra ebet en ho pue.

Quenta tra a dorri en ti-mân,
Me a grogo oc'h bleo da ben,
Ha memes tra oc'h da diouscouarn, daïc
tala,

Quen na zuint queit ha re un azen.

Diouzin-me'ta, goazet yaouanc,
Tachet da bligeout d'o Croague,
Divoallet na viot re vechant, daïc tala.
Pe e viot foueret couls ha me.